

Hymne de l'Apparition "Omnis expertem."

IV.

« MAM Dou-e di-nam, A bep kail-lar di-zam : »

Mæstr ar Vi-rio-nez Hen em-bann da ja-mes ; Ac ar

bobl fi-del A gan a vouez u-hel Ge-ned ar Ver-g'hez.

1.

« Mam Doue dinam,
A bep kail-lar dizam ; »
Mæstr ar Virionez
Hen embann da james ;
Ac ar bobl fidel
A gan a vouez uhel
Gened ar Verg'hez.

2.

He unan Mari,
Hel lavar gant dudi
D'eur plag'hik dister,
Paour, lent a tener :
Me zo « Concevet
» Er meas eus ar peg'het. »
Na kaera myster !

3.

O karrek eürus,
Dre ma z'eo Mam Jesus
Ennoc'h diskennet !
O reier benniget,
A skull heb paouez,
Founnus, dour a vuez,
Da bep drouk remed !

4.

Ama quaguennou
Tud a bep seurt broïou,
Gant ar chapeled,
Prim, devot, a zired,
Da q'houlen skoazel
Ous ar Verg'hez Santel
Ato selaouet.

5.

Ar Vam heb dale
A ro d'he bugale
Ho oll ezomou,
Ac a seac'h ha daëlou.
Hi d'ar gear neuze
A ia skanv a difre,
O renta grasou.

6.

Deomp ive, Guerg'hez,
Merkit ho trugarez :
P'e tenn al labour
Astennit ho sikour ;
Ma wask an anker,
Hon harpit d'he zougen,
Skuer a mellezour !

7.

D'an Tad en Nenvou,
Da Jesus hon Autrou,
D'ar Spered ivez,
Ra vo henor compez !
Rac tri en unan
Eo ar Feiz a gredan,
Bepred a bemdez !

Amen !

Imprimerie : le 28 Janvier 1931.

P. JONCOUR, Vic. gén.



En vente aux Bureaux de la *Semaine religieuse*, 31, rue Elie-Fréron,
Quimper. Un exemplaire, 0 fr. 05 ; franco, 0 fr. 10. — De même le can-
tique « Aux parfums d'algue... ».